

## KIS-490 – Br. -oniezh, -ouriezh

(TAM da GE – 20 03 96)

Tro a gavan da skrivañ hiziv, war-lerc'h ur goulenn digant Tugdual KALVEZ.  
[...] Sed amañ a skriv din :

“ Emaon oc'h en em c'houlenn peseurt diforc'h a vez graet etre -ONIEZH hag -OURIEZH. N'eo ket sklaer tamm ebet.

Da skouer e vez kavet BREDONIEZH evit psikologiezh er geriadurioù, hag ISTOROURIEZH pe KEVREDADOURIEZH evit ar skiant istorel hag ar sokiologiezh.

Ha ne vefe ket gwelloc'h unvaniñ an dibennoù :

-ONIEZH evit ar skiantoù, an holl skiantoù ;

-OURIEZH evit an doareoù anavout poellel met nann-skiantel, evel ar brederouriezh ?

Pe derc'hel -ONIEZH evit ar skiantoù resisañ hag -OURIEZH evit ar re all ?

Petra a soñjez eus ar gudenn ? ”

Evit gwir, ne soñjan netra, nemet mont da heul hag ober gant ar gerioù evel ma 'z int deuet din, hep klask « adober » ar yezh bep dek vloaz hep digarez sonn ebet.

(GE da TAM – 24 03 96)

Al lostgerioù *-ouriezh* hag *-oniezh*, evel a ouzout, zo bet keñveriet evit ar wech kentañ gant VALLEE en “ Avertissement...” derou e C'heriadur : *-our* lostger gwezhour, “ agents supérieurs, hommes de science ” (p. xvii) ; *-ouriez* “ noms des sciences qu'ils pratiquent ” (p. xviii) ; *-oni* lostger pennanvioù goubarel, “ *-oni*, et surtout *-oniez*, sont très employés pour former des noms de sciences ” (id.). Diwar sturiadurioù VALLEE eo bet diazezet holl arverioù an daou lostger-se abaoe, aozerion 'zo o vont betek o eeunaat d'ar goulun *-oniezh* "studi", *-ouriezh* "ober". Padal ne oa ket mennoz VALLEE gourlakaat un hevelep reizhiad, durc'hadurioù ster a verke hep mui. Hag e gwir e tiskouez ar gwerc'heladennoù forc'hadoù bras pe vrasoc'h. Un nebeut skouerioù :

Mar lezomp a-gostez ar furmoù rakvezant evel Br. *barzhoniezh*, *gwazoniezh* eo dav menegiñ an heverkañ forc'had graet gant VALLEE e-unan da ziskoulmañ ur gudenn a zasparzh geriadurel a voe, ur wech savet Br. *Douaroniezh*, rekouriñ d'al lostger all o verkañ ar skiantoù ha luniañ *Douarouriezh* hep re zamantiñ d'ar reolenn.

Ha perak, ya, *Kevredadouriezh* e-kichen *Bredoniezh* ? Ned eo ket dre un abeg a ouiziadoniezh — renket e vez an div en un kombod er-maez eus ar Ouezoniezh gant dalc'hiaded pennaenn an ergorelezh. Eeunoc'h an traoù : arnodet e voe *Kevredadoniezh*, met ken ponner oa e zevedoù (“ ar *gevredadoniourion* ”) ma voe dilezet evit *Kevredadouriezh*, un tammig skañvoc'h...

N'eus ket da nec'hiñ gant kement-se, er c'hontrol. An daouad *-oniezh*, *-ouriezh* n'eo ket direadus d'ur goulun sonn. Hogen dres, an durc'hadurioù ster bezant ennañ, an neuennadurioù stadet war e arver, e c'houzañvusted d'ar forc'hadoù zo kement all a vezusterioù a ra anezhañ ul loaz prizius evel m'emañ. A dra sur eo arabat e reizhiadekaad, e askornekaad, seul gent a se e goazhañ d'an eil pe da egile eus e dermenoù.

[...] Un evezhiadenn hepken war vrezhoneg Tugdual KALVEZ. Torroù e-leizh a ra, a-ratozh war a hañval, d'ar c'hendivizadoù yezhañ ha skrivañ, evel pa na vije ket koustet ker a-walc'h an emglev damc'hounezet goude un hanterkantved arvelloù lazerius. Damc'hounezet hepken, pa ginnig ar pleg heuliañ ar remziadoù na pa c'hoari gant lod ar poellata : n'omp ket evit kemmañ ar bed, ac'hoel kemmomp ar yezh. Re heñvel int ouzh Fraou, va c'hiez yaouank, o kousket war al leur yen ur wech lakaet he fallenn e pilhoù.